

14. Ar vue ma, ken berr, prestik a dremeno
Prestik da Vreiz-Izel vo red laret keno ;
Deut da vidomp nenze o Mam ken mad, ken douz,
D'hon kas genac'h d'ar Baradoz.

Evelse bezet gret.

AR GALL, *person Leskoët.*

Imprimatur :

Brioc'h, 17 augusti 1906.

Y.-M. LE PENNEC, *vic. gén.*



8N1-2-038

Leskoët

KANTIK HA PEDEN

D'AN

Itron Varia Garvèz

— **TON : Karvèz.**

DISKAN :

Itron Varia Garvèz, chelaouet hon feden,
Deuz lein ar Baradoz diskenet d'hon zouten ;
Evel hon zadou koz, tud a fe, tud nerzuz.
Hon dalc'het fidel da Jezuz.

KAN :

1. Ama, war al-lannek, kant via zo tremenet,
E kreiz eur voden spern, c'houi oe bet diskenet ;
Labour, trubuil ha poan zo spern ive, ziouaz !
Deut, ô Mam vad, diskenet c'hoaz.

2. Tristidigez a zo 'barz an amzer a ren,
An heol a zo kuzet, mouget gant ar voren ;
Nec'het ha nec'het braz Kalon ar Vretoned :
Petra vo 'n amzer da zonet ?
3. 'Vel eur vantel ganvou an noz 'uz d'an douar,
An noz du a zeu kaer adal ma par al loar,
Paret eta, Gwerc'hez, 'vel loar-gann an noziou,
Uz d'hon lannier, d'hon roziou.
4. Dirag hon daoulagad paret en peb mare,
Ha konfortet genac'h ni iei arok are,
Kreiz an denvalijen, kreiz labour ha poaniou,
Kreiz glac'har ha kreiz ankeniou.
5. Al labourer, n'he bark, pleget war an ero,
C'houezadur ouz he dal stank-stank o tivero,
A zanto diragoc'h he ziou vrec'h o krenvat,
Hag a labouro galon vad.
6. Ar c'hlanvour, n'he vele, koazet gant ar c'hlenved,
Evel ar ieotennik gant ar zee'hour goenvet,
A zedero ive vel ieotenn ar c'hlazen,
Da vintin pa goue ar c'hlizen.
7. Fall an hent, skuiz ar paour o tonet deuz a bell
Mès adal ma velo tourik koant ho chapel,
He dreid a vo skanvoc'h, skanvoc'h he baourante,
Dindan ho sell a garante.
8. Dre oll war an douar, dre oll zo poan spered,
Dre oll kalonou trist ha kalonou mantret :
Itrou Varia Garvez ô mam leun a drue.
Distanet glac'hariou 'r vue.
9. Aliez ar c'hleier a zon glaz ha kanvou,
Kerent pe mignoned a zo et d'an envou ;
Laret d'ar re a chom er bed-ma da oelo :
« Er Baradouz c'houi nem velo. »
10. Ar pec'her paour, zo c'hoaz zammet gant he bec'hed,
Gouliet he ine hag he galon nec'het ;
Ripu ar bec'herien, vitan goulet true,
Goulet pardon digant Doue.
11. Miret d'ar vugale hag ho mam hag ho zad
D'ho zével, d'he c'helen, koulz ha d'ho evesat.
Vit ma chomeint dinam e kreiz ar bed treitour.
'Vel kreiz ar waz al lili dour.
12. Gant ho taou zorn juntet, o pedi 'uz d'ar vro,
Diwallet hon farouz ha pell pell tro war dro ;
Ouz tud hag ouz loened pelleit ar c'hlenvejou
Ha gwall amzer ouz ar mejou.
13. O vervel war ar groaz, he ziou vrec'h digoret.
Jezuz a lar d'an dud : « Me ho kar, nem garet »
Gret d'he eta, Gwerc'hez, pac'h int ho vugale.
Nem garet an eil eglise.